

# KEVREDIGEZH KELENNERIEN AR BREZHONEG

Savet e 1958

## KER-VARKER

15, Rue Guy-Môquet, PARIS (17<sup>e</sup>)

PARIZ

Luskel va bag.

### Diskan

Luskel va bag war gribenn an dour,  
Luskel va bag ha red  
Digor da ouel d'an aveliou flour  
Sent ouz ar stor bepred.

### I

A-dal ar beure betek an noz,  
Pesketañ eo va lod.  
Kuitaet em eus va ziig kloz  
Kluchet e-tal an aod.

### II

Arnev oa bet, gleb teil e oan  
Kounaret oa ar mor,  
Se ne ra mann, ret eo kaout poan,  
Trec'h emp d'an avel-vor!

### III

Bremañ eo brav, seder ez on;  
Gwenn-erc'h e nij ar psum speum,  
Beg lemm va bag a skej an donn,  
Kaset emp dreist ar c'houmm.

### IV

Kent pell 'vo aet an heol da guzh,  
Pesked e-leiz am eus  
Tro-war-dro d'in, bezhinou druz,  
Va bag o zrec'h hep freuz.

Kerlann.